

BREIZ-IZEL

Allegretto

O ma Bro gaer a Vreiz
I-zel Ma c'ha-ran-te gwirion Daved-
oud pa do-lan eur zell Trid em
c'hreiz ma c'ha-lon

O ma bro gaer a Vreiz-Izel,
Ma c'harante wirion,
Daved-oud pa dolan eur zell,
Trid em c'hreiz ma c'halon.

Sed du-hont ar mor glaz-glizin,
War-n-an goueliou gwenkan ;
Ouz an ôd ar wagen lirzin
A darz en eur ganan.

En gwir, out-te perlezen Breiz
Ma mam-Vro Landreger,
Gant traoniennou glaz en ez leiz
Ha trevajou seder.

Pelloc'h eman Bro-Leoniz,
Bro an touriou uhel
Savet war gant ha kant iliz
'Tro da « Gastel santel ».

En Kerne na brao eo bevan
En êr skanv ar mene :
Pep tra 'zeblant seder ha glan
Pa ver tostoc'h d'an Nê.

War don Corre.

Ha dreist-holl, pez ra d'in tridal
Eo kavout tro-war-dro
Roudou tud an amzer gwech-all
Ho deuz savet ma Bro.

Sed a-hont eur chapelik koant
Kuzet er c'hlazenen :
Eno 'veve gwech all eur zant,
Eno 're e beden.

Deud he oa gant hon zadou koz,
Euz hon mam-Vro Tramor ;
O tec'hel dirag Yan ar Sôz
'Tiskentchont en Arvor.

N'anveet ket en Plouriou
Traouien doun Ar C'houiled ?
Eno kleze dir hon zadou
Ledaz an Normaned...

Klevet en meneiou Kerne,
An tad koz 'tisplegan
Penez harpaz ar Vro, ar Fe,
E dad a oa chouan.

War ho roudou, gwir Vretoned,
Oue difen ho pro,
Ni fell d'emp mont, ha mar be red
Skuilla hon gwad d'hon zro.

Sent hag ho peuz savet er gloar
Evel eur Vreiz Neve,
Gret ma skeudo Breiz an douar
Hoc'h hini 'zo en Nê !

(Kinniget d'e vignon TALDIR
gant ar barz ABHERVÉ).